

RAKTRES SKOLAJ DIWAN JAKEZ RIOU KEMPER *2010-2011*

Taolenn :

Kinnig ar skolaj

1. Brezhoneg : yezh ar studi, ar vuhez hag an dudi en ti
2. Stummañ, priziañ, heuliañ ha hentañ ar skolajidi
3. Ar skolaj, ul lec'h digor war ar bed hag an arzoù
4. Stagadennoù :
 - a. karta Diwan
 - b. raktres pedagogiezh eil derez Diwan
 - c. an AKED
 - d. ur c'hinnig eus ar beajoù
 - e. istor ar skolaj

Staliet eo hiziv an deiz hor skolaj e karter Penharz e Kemper.



Jakez Riou

5 straed Vañde – 29000 KEMPER

Pgz : 02 98 95 57 24

Plr : 02 98 95 71 51

<http://www.skolajdiwanjakezriou.com/>

E 2010-2011 eo savet hor skipailh gant an dud-mañ :

Padrig an Habask : rener, kelenner brezhoneg, penngelenner 4re

Mireille Andro : istor-douaroniezh, penngelenner 5ved

Olier Auffret : penngasour

Mathieu Balem : skiantoù fizikel, teknologiezh

Fañch Barveg : skiantoù ar vuhez hag an douar

Erwan ar Berr : istor-douaroniezh

Gaelle Bernard : deskadurezh korf ha sport

Katalin Boronkai : galleg, latin

Sten Charbonneau : brezhoneg, saozneg, penngelenner 6ved

Fanny Chauffin : c'hoariva, galleg

Ronan Debel : levraoueger

Marine Gloaguen : alamaneg, deskadurezh korf ha sport, galleg, skorerez pedagogel, penngelenner 6ved

Maela Guegan : saozneg, sonerezh, penngelenner 5ved

Brendan Huon, kasour

Soazig Kerouredan : kasourez

Ninnog Latimier : saozneg, adrener, penngelenner 3de

Gwenael Le Corre: matematikoù

Annaelle Le Goff: kastilhaneg

Soazig Le Breton : sekretourez

Anna Louarn : kasourez

Hoel Maleuvre-Gourmelon, levraoueger

Ronan Ménardeau : arzoù, brezhoneg, penngelenner 3de

Gisèle Mocaër : plac'h ar c'hempenn

Gael Peron : matematikoù, penngelenner 4re

Claude Poupon : micherour ratreer

Skoazell

Anna-Vari Diaskorn : dafarourez eil derez Diwan

Arnaud Gestin : kontaouer

Yann Rivière : skoazeller buhez skol

Skipailh ADC : boued


Klasadoù

Eizh klasad a zo dindan hon atebegzh :


Klas	6ved glas	6ved melen	5ved glas	5ved melen	4re glas	4re melen	3de glas	3de melen
Niver a skolajidi	25	23	18	17	15	16	17	17

Aozañ ar skolaj

ESTAJ



EN TRAONÑ



WAR AR PORZH



Dre ma kresk niver ar skolajidi e teuo buan an ti-skolaj da vezañ enk warnomp ha gouzañv a reomp dija diwar an diaez da c'hellout implijout lec'hioù sport evit ar c'hentelioù DKS.

Diabarzhidi ha kouskva :

78 diabarzhidi a zegemerer e kreizenn Ker Heol Plogastell-Sant-Jermen , 43 flac'h ha 35 paotr , 2 gasourez 1 c'hasour hag 1 penngasour d'ober war o zro.

Deskiñ bevañ holl asambles hag ober get ar brezhoneg eo lodenn bennañ raktres pedagogel an hunva : bevañ en hunva 'zo tenniñ gounid ag ar vuhez a stroll evit mont pelloc'h get ar brezhoneg e bal.

Filajoù ingal (1 bep sizhun) dre live klas, abadennoù c'hoariva, sonerezh, prantadoù sport 'sikour an diabarzhidi da gemer perzh ha da vout muioc'h ba e vleud get ar brezhoneg, dre an ober , dre an eskemm vez klasket gantañ bezañ emren ivez.

Kinniget' vez ivez d'an diabarzhidi kluboù liesseurt (kelenourion ha kasourion e-karg) :

- keginañ ;
- soniñ musik ;
- yoga ;
- sevel filmoù ;
- sport a-stroll...

kaout plijadur e brezhoneg o fal.

Deskiñ labourat e-unan 'zo ivez ur pal da dizhout e fin ar bleadoù hunva : prantadoù studi dre live klas vez savet, get fichenoù heuliañ labour hiniennel 'vez heuliet a dost labour skol an diabarzhidi prantadoù studi skoazell 'vez ivez da sikour an diabarzhidi , diaesterioù skol gante.

Dibaboù pedagogel : dasparzh ar c'heleñn

Live	Kentelioù ret	Yezhoù kinniget	Opsion	Hag ivez
6ved	Diouzh lezenn + brezhoneg	saozneg		c'hoariva*, deskiñ-deskiñ*, skoazell
5ved	Diouzh lezenn + brezhoneg	saozneg	latin	c'hoariva*, skoazell
4re	Diouzh lezenn + brezhoneg	saozneg, alamaneg, kastilhaneg	latin	skoazell
3de	Diouzh lezenn + brezhoneg	saozneg, alamaneg, kastilhaneg	latin	skoazell

* ur prantad ar sizhun

Studi skoazellet a vez kinniget d'an holl etre 5e ha 5e45 da Lun ha da Yaou

1 Brezhoneg : yezh ar studi, ar vuhez hag an dudi en ti

Goulenn a reer digant ar skolajidi ober gant ar brezhoneg en holl zegouezhioù. Kement-se a-benn boutinaat hag aesaat o implij hag o mestroni eus ar yezh betek gellout komz gant fiziañs.

Seul ziaesoc'h e vo d'ar skolajidi doujañ d' ar reolenn-se ma ne gomprenont ket ar perag. Ret eo d'ar skolajidi anavezout raktres Diwan ha bezañ mennet da gemer perzh ennañ. Ret eo dezho ivez anavezout sevenadur Breizh war tachennoù all estreget ar yezh.

Youl skipailh ar skolaj eo lakaat an holl skolajidi da vezañ en o bleud e brezhoneg ha da zoujañ dezhañ kement ha da zanvez Breizh dre vras.

Obererezhioù

Petra	Da be vare?
Kentelioù brezhoneg	A-hed ar bloaz
Priz ar yaouankiz	Ur wech ar bloaz
½ zevezhioù plijadur	Goude pep prantad vakañsoù
Filmoù Daoulagad Breizh	3 film ar bloaz, diviz da heul e pep live. Emglev gevellañ gant Kuzul-meur Penn-ar-Bed.
Radio Kerne	Implijout danvez radio hag enrollañ er skolaj. Emglev ofisiel.
kleuboù	Ur wech ar sizhun
Kouskva : beilhadegoù	A-hed ar bloaz, diouzh an noz (diabarzhidi)
AKED	2 bleustraked hag an arnodenn
Brezhonegerien ar bloaz	Paeroniañ (1añ trimiziad), prof e dibenn ar bloaz
Redadeg bep eil bloaz	Kelaouiñ, broudañ ha kemer perzh
Blog ar skolaj : http://www.skolajdiwanjakezriou.com/	Ingall pennadoù diwar-benn buhez ar skolaj
Treizherien soñjoù	Darempred gant brezhonegerien a-vihanik

2 Stummañ, priziañ, heuliañ hag hentañ ar skolajidi

Pal ar skolaj eo stummañ an holl skolajidi ha digeriñ dezho an hent da zont a-benn er gevredigezh, war an tachennoù sokial ha micherel.

A-bouez eo anavezout mat ar skolajidi a erru er skolaj a-benn gellet ober war o zro : peseurt live skol a zo ganto, peseurt live brezhoneg a zo ganto, eus peseurt skol e teuont, peseurt diaezamantoù a zo ganto, petra a soñj dezho ober goude ar skolaj.

Diazezet eo ar priziañ war an diazezoù boutin (priziañ pozitivel dre varregezhioù).

Live	Ober
CM2	Tro ar skolioù, dorioù digor, devezh degemer CM2, tro ar skoalerien, teuliadoù skol
6ved	Distro-skol a-ratozh, ur prantad penngelenner ar sizhun, deskiñ-deskiñ, emgavioù gant ar gerent (kentañ trimiziad), kuzulioù-klas
5ved	ur prantad penngelenner ar sizhun, emgavioù gant ar gerent (kentañ trimiziad), kuzulioù-klas, ASSR 1
4re	Un hanter brantad penngelenner ar sizhun, emgavioù gant ar gerent (kentañ trimiziad), kuzulioù-klas, staj micher, live A2 (yezhoù estren)
3de	Emgavioù gant ar gerent (kentañ trimiziad), kuzulioù-klas, staj micher, teuliad hentañ, kroashent ar micherioù, gweladenniñ lise Diwan, pleustraked, AKED, breved, ASSR2, AUI

3 Ar skolaj, ul lec'h digor war ar bed hag an arzoù

Ar skolaj a rank bezañ ul lec'h eskemm etre an holl berzhidi : ar skipailh pedagogiezh, ar gerent hag ar skolajidi.

Ober	Doare
Kuzul-klas	Prientiñ hag ober war-dro ar rentaoù-kont trimiziad. Perzhidi : renerezh, kelennerien, kerent, penngasour, skolajidi Devezh stummadur an dileuridi.
Kuzul-skolaj	Ober war-dro buhez pemdeziek ar skolaj : kouskva, predoù, reolennoù mont en-dro. Perzhidi : renerezh, kelennerien, kerent, penngasour, skolajidi
Kuzul-merañ	Merañ ar skolaj e-keñver budjed, postadur, savadurioù, diorren dre vras. Perzhidi : renerezh, kelennerien, kerent, ti-kêr, departamant, Diwan Breizh
Kuzul-skoazell ar skolaj	Dastum arc'hant evit gwellaat dafar ar skolaj, brudañ ha skoazellañ. Perzhidi : an holl re a youl vat a fell dezho
Bodad boued	Divizout ha kinnig war ar predoù. Perzhidi : renerezh, kerent, skolajidi, ADC, (tud pedet)
Skolajidi e karg	Kempenn ar salioù-klas, ar c'houkva, renabliñ al labour-noz a vez fiziet er skolajidi
Endro	Emskiantekaat ar skolajidi ouzh ar c'hudennoù endro : dastum paper, espern energiezh, dibab dilerc'hioù
Brezhoneg	Klask a reer emskiantekaat ar skolajidi ouzh ar brezhoneg e diavaez ar skol : kelaouennoù, abadennoù skinwel, filmoù Daoulagad Breizh, tud pedet
Prantadoù kelaouiñ	Emskiantekaat ar skolajidi ouzh ar riskloù a zo stag ouzh produioù pe emzalc'hioù zo : dramm, alkool, butun, darempredoù korf, internet.
Ar bed	Beajoù-skol, degemer kenskriverien, eskemm lizhiri, AUI
Arzoù ha sevenadur	Renkell istor an arzoù, gweladenniñ mirdioù, tud pedet, kleuboù, arnodenn istor an arzoù e 3de klas, Sevenadur Breizh : dañsoù Breizh, fardañ krampouezh...

4 Stagadennoù

a Karta Diwan

1. Digor eo ar gevredigezh Diwan d'an holl familhoù a fell dezho reiñ un deskadurezh e brezhoneg d'o bugale, hep diforc'h sokiomicherel, prederouriezhel pe bolitikel. Digoust ha digor d'an holl eo ar skolioù.
2. Bez'ez eus eus Diwan abalamour da vankoù an Deskadurezh Stad na ro ket e blas d'ar brezhoneg; goulenn a ra groñs Diwan ma vo kemeret e karg he skolioù en ur servij deskadurezh publik demokratel ha renevezet e Breizh, a aotreo implij ar brezhoneg evel yezh kevredigezhel eus ar skolioù-mamm betek ar skolioù-meur en holl domanioù ar c'heleñn.
3. Distag eo Diwan diouzh pep aozadur prederouriezhel, politikel, sindikadel, h.a. Rak-se ec'h embann Diwan e c'houlenn groñs he stourm ma vo doujet da gredennoù relijiel, prederouriezhel pe politikel he holl izili forzh pere a vefent gant ma ne vint ket kontrol da Zisklêriadur Hollvedel Gwirioù Mab-den. An habaskter hollret-mañ a gas Diwan da zifenn ha da vroudañ al laikelezh en he c'heleñnadurezh ha dont da c'hred da frankiz soñjal pep hini.
4. Diwan a laka e plas ur c'heleñn demokratel o kenlabourat a-zevri gant ar gerent, ar strollegezhioù lec'hel hag ar gelennerien. Goulenn a ra Diwan digant tud ar vugale krouiñ e-touez an tiegezh un aergelc'h emsav a-benn reiñ d'ar brezhoneg e blas en o buhez pemdez.
5. Gouestlañ a ra Diwan broudañ implij ar brezhoneg d'an holl liveoù e diabarzh ar gevredigezh; Eus un tu all e kas Diwan war-raok un diorroadur sevenadurel e brezhoneg a ro da bep bugel ar muiañ a gartennoù-trec'h evit sevel e-unan e zazont had a ro an tu da vugale Breizh da gemer e karg o endro naturel, sokial hag armerzhel.
6. Disklêriañ a ra Diwan bezañ a-enep pep unneuziadur yezhel, bezañ stag ouzh ar stummoù disheñvel a eztaoladoù sevenadurel, hag embann a ra n'eus nemet o c'henklokauster a zegas unaniezh ha kenbinvidigezh stroll. Ar brezhoneg kelennet e skolioù-mamm Diwan zo an hini implijet en o endro douaroniezhel ha denel.
7. A-du gant gwirioù dilammadus ar pobloù d'en em ezteurel dre o sevenadur dezho o-unan e c'halv Diwan kement hinienn zo tomm ouzh an demokratelezh, an aozadurioù sevenadurel breizhek, an aozadurioù sindikadel, re ar gelennerien peurgetket, da stourm a-gevret ganti evit muioc'h a justis hag a-enep pep furm a vac'homerezh sevenadurel.
8. Diskleriañ a ra Diwan bezañ kengred gant an holl bobloù a stourm evit o fersonded sevenadurel, lakaet e-barzh al labourererien enbroet, hag e embann e talvez o liesseurtegezh da binvidikaat glad mab-den.

B Raktres pedagogiezh Eil Derez Diwan

DIAZEZ RAKTRES PEDAGOGIEZH EIL DEREZ DIWAN

- Reiñ un deskadurezh e brezhoneg par ha par skiantel ha lennegel
- Bezañ ul lec'h bevañ, deskiñ, daremprediñ... e brezhoneg
- Kas ar skolajidi war-zu an emrenerezh, ar vuhez a-stroll, broudañ o intrudu...
- Digeriñ ar skolajidi war ar bed-holl
- Lakaat an holl da dennañ ar gwellañ gounid eus o barregezhioù ha donezonoù hiniennel evito o-unan hag evit mad an holl.

	SKOLAJ	DOAREOÙ (skouerioù)	LISE
BREZHONEG	<ul style="list-style-type: none"> - Bezañ gouest d'ober gant ar brezhoneg : da vevañ e brezhoneg, da grouiñ, dizoleiñ - Ober o studioù e brezhoneg ha dont da vezañ brezhonegerien 	<ul style="list-style-type: none"> - Bevañ e brezhoneg - Studiañ e brezhoneg - Ober e brezhoneg - Krouiñ e brezhoneg - C'hoari e brezhoneg ha kaout plijadur - Daremprediñ brezhonegerien (c'hoariva, c'hoarioù) 	<ul style="list-style-type: none"> - Ober gant ar brezhoneg - Dizoleiñ sevenadur Breizh dre ar brezhoneg - Digeriñ war bed brezhonek deroù an 21vet dre ar c'hazetennerzh hag ar c'hleweled - Digeriñ dre ar brezhoneg dorioù ar micherioù
DANVEZIOÙ SKIANTEL	<ul style="list-style-type: none"> - Kaout gouiziegezh war ar bed skiantel hag an ekologiezh - Kregiñ gant un hentenn skiantel - Kaout ur sell hollek war bed ar skiantoù 	<ul style="list-style-type: none"> - Deskiñ dre ar brezhoneg - Kompren ha deskiñ dre arnodin 	<ul style="list-style-type: none"> - Resisaat an danvez - Implij an hentenn skiantel
YEZHOUÙ ESTREN	<ul style="list-style-type: none"> - Deskiñ ar yezh - Dizoleiñ ar vro - Klask soubañ er yezh 	<ul style="list-style-type: none"> - Kentelioù yezh - Eskemmoù lizhiri gant broioù divyezhek - Beajoù eskemm o liammañ meur a zavez - radio, tele, tud pedet... 	<ul style="list-style-type: none"> - Bezañ e darempred gant pobloù Europa - Bezañ digor war ar sevenadurioù estren - Bezañ emskiant eus ar yezhoù bihan - Kaout ur preder war ar yezh dre ar yezhadur E saozneg : Kaout ar First Certificate
DOAREOÙ BEZAÑ	<ul style="list-style-type: none"> - Mont war-zu an emrenerezh e-keñver buhez a-stroll, labour, soñjoù... - Deskiñ bevañ a-stroll - Doujañ ouzh an endro hag an dud - Bezañ digor war ar bed holl - Kaout ur spered skipailh ha kenskoazell - Darempredoù gant ar stroll kelenn - Kemer perzh e buhez ar Skolaj e- 	<ul style="list-style-type: none"> - Kargoù resis - Emvodoù-klas - Dilenn dileuridi - Mont da zileuriad - Kannaded e kuzulioù-klas, kuzulioù-skolaj... Lise : - Kaout 2 gannad e Kendalc'h DIWAN - Gellet bezañ ezel eus 	<ul style="list-style-type: none"> - Bezañ emren e-keñver : soñjoù, buhez a-stroll - Kaout intrudu - Bezañ gouest da gas raktresoù da benn - Bevañ a-stroll

	keñver mont-en-dro boutin, divizoù...	kevredigezhioù zo : DAZONT, DIWAN...	
KENLUSKAÑ	- Reiñ da bep hini an tuioù, ar binvioù da zont a benn - Skoazellañ en un doare hollek hag hiniennel	- Kuzulioù-klas - Kenskoazell - Prantadoù hentet-evezhiet - Hentañ - Kentelioù skoazell - Deskiñ-deskiñ	- Kas an holl da live ar vachelouriezh, ar First Certificate
MICHERIOÙ	- Dizoleiñ bed ar micherioù	- Prezegenoù, darempredoù... - Staj 3de klas - Prantadoù deskiñ-deskiñ (Skolaj) - Prantadoù henchañ micherel (Lise)	- Anavezout gwelloc'h ar micherioù ha sevel pep a raktres hiniennel - Dizoleiñ danvez micherel dre ar c'hazetennerezh, ar c'hleweled, an treiñ
SEVENADUR	- Kaout krog war Sevenadur Breizh, Sevenadur Europa, Sevenadur ar Bed	- Lennegezh c'halleg - Lennegezh vrezhoneg - Lennegezh Breizh - Lennegezh Europa - ... - Raktresoù arzel : c'hoariva, dañsoù, sonerezh, livañ - Istor-Geografiezh Breizh - Istor-Geografiezh Europa - Istor-Geografiezh ar Bed - Kazetennerezh - Kleweled	- Anavezout gwelloc'h sevenadurioù Breizh, Europa hag ar Bed
SPORT	- Diorren barregezhioù en un doare hollek (korf ha personelezh) - Degas dre ar skiant-prenet an ampartizoù hag ar gouiziegezhioù a denn d'ar sportoù pe d'an doareoù da zaremprediñ dre ar c'horf - Deskiñ doujañ d'e gorf hag intent outañ ingal	- Dre ar gouren - Sportoù a-bep seurt (aozadur, orin, perzhioù goulennet digant ar c'horf...) - Kompren, doujañ d'ar reolennoù - Dic'hourdañ, diskuizhañ	- Mont pelloc'h gant palioù ar skolaj - Henchañ gwelloc'h labour pep hini : er skipailh, ar gourdoniñ

C An AKED

Pal an AKED (Arnodenn Kreiz an Eil Derezh) eo reiñ tro d'ar skolajidi da ziskouez o barregezhioù liesseurt e fin ar pevar bloavezh skolaj, dre ar brezhoneg (war-bouez ar yezhoù all evel-just) ha reiñ ur plas a-feson d'an ezteurel dre gomz.

Diazezet eo war ar mennozhioù amañ da-heul :

- Kement danvez a vez kelennet, kement tra a vez graet er skolaj a zo talvoudus hag a c'hell, neuze, bezañ priziet e fin ar 4 bloavezh skolaj,
- Leuskel ar skolajidi da zibab danvezioù' zo en AKED eo ar gwellañ doare da reiñ un dalvoudegezh d'an arnodenn-mañ (ha, war hir dermen, d'an danvezioù).

Bez' ez eus 3 arnodenn dre skrid, tremenet dre ret gant an holl skolajidi.

- Brezhoneg
- Matematik
- Istor pe Geografiezh

Pep skolajiad a ranko ivez tremen 3 arnodenn dre gomz, brezhoneg dre ret ha daou zanvez da zibab. D'ar muiañ e c'heller dibab un danvez dre rummad.

Danvezioù skiantel ha teknikel	Danvezioù yezhel ha lennegel	Danvezioù sevenadurel	Danvezioù pleustrek
Matematik		Istor	Sonerezh
Skiantoù fizikel	Saozneg	Geografiezh	Arzoù
SVD	Galleg	Deskadurezh keodedel	C'hoariva
Urzhiaaerezh	Alamaneg		DKS
Teknologiezh	Kastilhaneg		
	Latin		

Ret eo tapout ar geidenn hollek (75 poent diwar 150) evit tapout an AKED. N'eus ket a notenn skarz.

D Ar beajoù-skol

Gant ar beajoù e tesker : bevañ asambles e brezhoneg, dizoloiñ sevenadurioù, implijout ar yezhoù studiet er skolaj...

6ved	Ur veajig he fal anavezout gwelloc'h ar skolajidi all, Breizh hag he sevenadur. Klasket e vez kejañ ouzh brezhonegerien e-pad ar veaj.
5ved	Ur veaj en ur vro saoznek e-pad 5 devezh. Implij ar saozneg eo ar pal kentañ.
3°/4° (bep 2 vloaz)	A bep eil e vez degemeret Sorabiz pe aozet ur veaj da Luzasia. Implij an alamaneg ha bevañ en ur saviad divyezhek eo ar palioù kentañ.
3° (bep bloaz)	Ur veaj da Euskadi e-pad ur sizhunvezh. Implij ar c'hastilhaneg ha bevañ en ur saviad divyezhek eo ar palioù kentañ. Kenskriverien a vez degemeret ganeomp e-pad ur sizhunvezh ivez. Beaj latinland, war roudoù ar sevenadur roman

E Istor ar skolaj

Digoret e oa bet e miz Gwengolo 1997 e Kemper.

Da gentañ en ur c'hloerdi kozh e Kerfeunteun, e diadreñv an ti a oa annezet d'ar poent-se gant Skolaj Santez-Anna. E salioù klas hag e lodennoù savadurioù na oant ket holl e stad vat da zegemer skolajidi. Anneziñ a rae ar skolidi en estajoù ar c'hloerdi. Da neuze e oa diabarzhiat hogos hon holl skolajidi, zoken ar re a oa o chom e Kemper. Tamm-ha-tamm, a feur m'eo en em dennet Skolaj Santez-Anna hon eus bet muioc'h a blas ha gwelloc'h plas ivez, salioù klas dereatoc'h. Gant an eskopti a oa perc'henn war ar c'hloerdi e ouiemp ne badje ket da viken hor chomadur eno ha sklaeroc'h e oa bet c'hoazh pa oa bet lakaet ar c'hloerdi e gwerzh. N'hor boa mui tamm amzer da zont ebet er savadur-se ha ret e voe deomp er c'huitaat en hañvezh 2004. Un diskoulm a oa bet kavet gant Diwan, ar C'huzul-meur ha Ti-kêr Kemper da gaout un ti-skolaj hag un ti-anez. Staliet omp eta e Penharz e skol gozh Kervoazan, anvet skol Louis Hemon kentoc'h.

An ti-anez a zo bet e-pad daou vloaz e kreizenn vakañsoù Berry-Tudy en Enez-Tudi (bloavezhioù-skol 2004/2005 ha 2005/2006). Klasket hon eus kavout unan tostoc'h ha degemeret omp bet gant Kambr Micherioù Penn-ar-Bed en ur savadur a oa kentoc'h d'ar greizenn-stummañ evit deskarded war ar sevel-tiez (bloavezhioù-skol 2006/2007 ha 2007/2008). Evel ma oa c'hoarvezet e Kerfeunteun ez eus bet ezhomm d'ober labourioù evit gwellaat ar surentez en ti-anez. Gant adnevezadur Kuzon hon eus ranket mont kuit da lojañ e kreizenn Kerheol an ULAMIR e bourc'h Plogastell Sant-Jermen en distro-skol 2008. Eno omp chomet e 2009-2010 hag e chomimp e 2010-2011. Anat eo, avat, ez eo leun-tenn an ti-anez hag e rankimp kaout plas da vuic'h a dud hep dale.

E Kerfeunteun e oa bet graet ar braz eus al labourioù-se bennozh d'ar C'huzul-meur, e Kuzon e vezont graet gant ar gerent ha gant implijidi. Abaoe deroù hor skolaj ez eus bet ezhomm eus sikour ar gerent war-dro kempenn, azlivañ, gwellaat ar savadurioù... Hep ar genskoazell hag an unaniezh-se ne c'helljemp ket bezañ deuet a-benn ha ne c'hellfemp ket prientiñ hon amzer da zont. Trugarez eta !

Tamm-ha-tamm eo endroet orin hor skolajidi. Da gentañ e teue da **adklasoù Kemper Skolaj Diwan Roparz Hemon** bugale a drowardroioù Kemper, eus Bro-Wened koulz hag eus Bro-Naoned. Ken ma voe digoret Skolaj Diwan ar Mor-Bihan e 1999. Hor skolajidi a zeu bremañ eus pemp skol Diwan hon tolead (Kemperle, Banaleg, Tregon, Kemper I ha II, Kraozon) hag eus klasoù divyezhek div skol bublik, hini Douarnenez ha hini Plozeur. Deuet da vezañ **Skolaj Diwan Kemper** da gentañ en deus kemeret anv **Skolaj Diwan Jakez Riou** adalek 2005. Ma'z eo anavezet frammoù tri fennek Skolaj Penn-ar-Bed gant Diwan (ar Releg, Gwiseni, Kemper) e chom betek bremañ evit an Deskadurezh Stad ur skolaj hepken, Skolaj Diwan Penn-ar-Bed, rannet e tri lec'h. Tonket eo d'hor skolaj dont da vezañ anavezet gant an akademiezh dindan an anv a Skolaj Diwan Jakez Riou.

A van da van eta ez eur deuet da gadarnaat hor bezañs ha da vezañ ur gwir skolaj, skrivet e anv war e dalbenn. Gwellaet eo an aozioù deskiñ ivez gant salioù-klas sklaer, frank ha kempenn. Staliet eo bet ar genrouedad e pep sal glas gant pep a urzhiataer hag a videobanner... emeur o plediñ gant peurstaliadur ar sal skiantoù hag e teuo tro ar sal teknologiezh da heul. Ur striv a zoare a zo bet graet ivez gant Ninnog evit staliañ sal ar yezhoù en un doare spletus evit al labourioù a-stroll ha deuet eo ar sal-se da vezañ sal ar yezhoù.

Hor preder a zo gant unaniñ ti-skol ha ti-anez. Un torr-penn e chom kaout un ti-anez, unan dereat, diouzh redioù ar surentez, hag ivez un torr lañs gant an dilec'hiañ ret etre an daou blas. Hor mennad eo eta dont a-benn da gaout en hevelep lec'h ti-skol ha ti-anez evit brasañ mad hor skolaj !